

Rakskrid




01 - Herve Gouedard

Kavet e vo, el levr-mañ, pennadoù-skrid hag a zo bet savet etre miz Kerzu 2012 ha miz Eost 2013, evit ar gelaouenn sizhuniek *YA!*. Ma leze rener ar gelaouenn kabestr ganin da skrivañ pezh a garen, redioù a oa evelato : da gentañ ha dreist pep tra e ranken sevel pennadoù diwar-benn glad hor bro ; da eil e oa ret din kas ur pennad-skrid bep sizhun ; erfin ne dlee va fennadoù bezañ na re hir na re verr, abalamour dezhe da glotañ gant ar vent goulennet gant ur gelaouenn a-seurt gant an hini e oan o kenlabourat

ganti. Awenet eo bet ar pennadoù a gavor el levr-mañ, holl gwitibunañ, a-bell pe a-dost, gant istor Breizh, pe, pa lavarinn mat, gant keal ar glad, da lavaret eo “kement a ya d’ober madoù, hêrezh voutin ur vro”. Ur c’heal ledan-ledan eo ar glad avat, ha gwell a-se, rak n’em eus graet mann, e gwirionez, nemet bale difonn e bed al levrioù hag an eñvor, ha kutuilh, e liorzh an istor, darvoudoù ha degouezhioù a bep seurt. Bep sizhun eta em eus bet choazet evel-se gwech un darvoud istorel, gwech ur savadur heverk, gwech ul lec’h awenus, gwech un darvoud sevenadurel, un deiziad pe un den, bet dezhañ ur vuhez er-maez eus al leur gozh, ha klasket em eus, bep tro, skrivañ ur bajennad bennak diwar-benn an danvez e oan bet awenet gantañ. N’eo ket an teskad-mañ ul levr istor, e nep keñver, ur meni bokedad avat ne lavaran ket, ennañ darvoudoù ha degouezhioù dastumet e liorzh istor hor bro, ha bouetaet gant va faltazi.

Trugarekaat a ran Yann-Fanch Jacq, rener ar gelaouenn, en deus roet tro din da skrivañ hag aotreet ac’hanon da embann va skridoù en teskad-mañ.



02 - Guy Ropartz

1864 Ganedigezh Guy Ropartz e Gwengamp

*« Setu ma par ar gensoniezh
gant he daoulagad flamm evel
sked ar galon. »
(Maodez Glanndour)*

Iliz Sant-Loup, ar barrez vihan-se eus Bro-Oueloù, ken dudio, etre Plouha ha Ploueg-ar-Mor, e voe kaeraet kalz an ofisoù hag an oferennoù enni e bloavezhioù hanterkant ar c’hantved all abalamour ma oa en em dennet er vro-se, goude ur vuhez gouestlet d’ar sonerezh, un den hag a oa bet, war un dro, barzh ha sonaozour. An den-se, Guy Ropartz e anv, a oa deuet war an douar e 1864, e Gwengamp, hag ar c’hanedigezh-se a zo testeniet gant ur maen-koun a c’heller gwelet bremañ c’hoazh pa dremener dre ar straed veur. Etre Gwengamp ha Sant-Loup n’eo ket gwall hir an hent, a gred deoc’h ? Nann, evel-just, ha n’eo ket me eo a lavaro ar c’hontrol. Hogen ar Guy Ropartz-se ne oa ket aet eus Gwengamp da Sant-Loup dre

ar berrañ, ha dispenn e roudoù etre 1864 ha 1955, eus Gwengamp da Wened, eus Roazhon da Bariz, betek Nancy ha Strasbourg a zo, war ar memes tro, beajiñ e bed al lizhiri hag ar sonerezh hag ober gwelloc’h anaoudegezh gant sonaozourien ha lenneien hag a zo chomet bev-mat o anvioù betek bremañ. Deomp de’i !

Mab e oa d’un alvokad eus Gwengamp, lenneg, skrivagner hag istorour en e eurvezhioù goar, ha bet skrivet gantañ, e 1851, un *Istor eus ar gêr a Wengamp*. Guy, daoust ma ’z eus anien un arzour ennañ, a studio ar gwir e Roazhon, kuit da zisplijout d’e dad ha da sachañ warnañ e danfoeltr. Kuit ivez da enkreziñ kalon dener e vamm. Koulskoude n’eo gwall droet da vreutaat dirak al lezioù-barn, hag ur

wech aotreet war ar gwir ha diazezet mat e vuhez e Pariz, e laka e anv e skol sonerezh ar gêr-se. Eno e labour dindan renerezh daou sonaozour eus ar re wellañ, Massenet ha Cesar Franck o anv. Hemañ diwezhañ e vo don e levezon war ar Breizhad yaouank, ha drezañ e voazo Guy Ropartz diouzh doareoù labour hag diouzh meizadennoù disheñvel a-grenn diouzh ar c’hrouiñ akademikel rik a oa diouzh ar c’hiz d’ar c’houlz-se. Betek an oad a dregont vloaz ne oar ket re vat war be tu treiñ : daoust hag e rank gouestlañ e holl nerzh d’ar sonerezh, peotramant derc’hel da skrivañ, evel ma ra abaoe un toullad bloavezhioù, e bannoù ar gelaouenn lennegel hag arzel *An Ermin*, gant e vignon Loeiz Tiercelin ? An daou zen a embann zoken, e 1889, un dastumadenn barzhonegoù anvet *Ar Parnas Breizhek a-vremañ*. Ar respont a voe roet dezhañ pa voe bet anvet da rener skol sonerezh Nancy, e 1894. Labour vat a raio eno kent bezañ anvet, e 1919, e penn skol sonerezh Strasbourg, ma raio e seizh gwellañ evit brudañ sonaozourien nebeut anavezet d’ar c’houlz-se hag evit pediñ war al leurennoù sonerien-sonadeg yaouank. War un dro gant e vicher kelenner hag e garg a rener e sonaozo kalz, ha dleout a reomp dezhañ sinfoniennoù, barzhonegoù sinfoniel, konsertoioù, rapsodiennnoù, sonatennoù... Pleustret en deus ivez ar sonerezh relijiel, hag ar songarourien a-vremañ n’eo ket dianav e oberennoù dezho. Alies-mat e veneger e anv a-gevret gant re Paol ar Flem, eus Lezardrev, pe Paol Ladmirault, eus Naoned.

En he levr *Sonerien ha sonaozourien Vreizh*, deuet er-maez er bloavezhioù pevar-ugent, e lavar Vefa de Bellaing deomp e oa Guy Ropartz ur sonaozour dieub e spered, gwirion, diardoù ha prizet-meurbet. Skrivañ a ra ivez e oa bet awenet Ropartz gant e garantez evit ar Vaouez, e garantez evit e vro c’henidik, hag e garantez evit Doue. Ur gaer a dreinded, hep mar ebet !

Pa voe deuet ar c’houlz dezhañ da zisterniañ e reas e annez e Sant-Loup, lec’h ma kendalc’has da sonaozañ. Degemer a reas en e di, betek dibenn e vuhez, arzourien ha sonaozourien en doa graet anaoudegezh gante dre e vicher pe e-kerzh ar beajoù niverus en doa graet en Europa, rak ur gwall veajour e oa bet. Techet on da grediñ ez eo bet boemet e weladennerien gant o zremen eno, rak Sant-Loup a zo, hep nep mar, ur c’hornad bamus, lec’hiet brav evel m’emañ e-kreiz ar maezioù glas. N’emañ ket ar mor gwall bell, hag a-wechoù e santer e alan sall betek tiez ar bourk, tamolodet en-dro d’an iliz kozh. Neuze e vezer mezevellet gant blaz taer ar pellderioù didermen, ha, ma selaouer mat e klever, war divaskell an avel, tonioù ha sonioù dudius ar sonaozour...



03 - Aloubadegoù norman (emgann Sancourt-en-Vimeu, 886)

24 a viz Even 849 An Normaned fallakr a ra skrap ha riñs en Naoned

*Ar Vikinged dre-holl o doa
hadet ar spont, skuilhet ar
gwad, ha tangwallet
hor savadurioù kaerañ.*

E 1904 e kavas hendraourien norvegat, en ul lec'h anvet Oseborg, damdost da Oslo, un drakkar, ennañ a bep seurt armoù ha binvioù : morzholioù, gweltreoù, tachoù, turkezoù, bouc'hilli, heskennoù, taladurioù... E-touesk ar bitrakoù munut hag an traouerezh dister bet lakaet war-wel da geñver ar furchadennoù-se e oa ivez listri ha braverioù arc'hant hag aremennoù kontet da vezañ, bremañ c'hoazh, kant vloaz goude, pennoberioù arzel ar sevenadur skandinaviat a vleunias e broioù an hanternoz etre an VIII^{vet} hag an XI^{vet} kantved. Ar pezh kaerañ a zo, hep nep mar, ur spilhenn-grog rikamanet, warni gweadurioù, linennoù flour d'al lagad oc'h en em veskañ hag en em glask hep en em luziat morse. Kement ha ken bihan m'en

em c'houlenner ha gwir eo ar pezh a vez kontet diwar-benn ar Vikinged el levrioù istor. Padal an Normaned, kaer o devoa bezañ troet gant an arzoù, a oa ivez tud ferv, brezelourien griz, a hadas ar skrij hag ar marv en Europa hag e Breizh, e-pad pell amzer.

Emaomp er bloavezh 843. An Normaned a sav gant aber al Liger war o bigi skañv, o preizhata par ma c'hallont, o vuntrañ hag o tangwallañ ar vro. D'ar 24 a viz Even emaint dirak an Naoned. Sailhañ a reont war ar gêr abred diouzh ar mintin. Ur c'hronikour eus an amzer-se, bet test eus an arsailh, en deus danevellet an darvoudoù skrijus-se : « *P'en em gavas an dud dizoue-se dirak an iliz-veur e tiframmjont an dorioù, e lakjont ar*

prenestroù a-dammoù, hag ar mor a dud a oa eno, ur wech kouezhet etre o c'hrabanoù, a rankas perisañ, rak an dud fallakr-se ne espernjont nag ar re yaouank, nag ar re gozh, nag ar merc'hed nag ar maouezed.... Lazhañ a rejont ivez Gohard, a oa oc'h oferenniñ. Kalz beleien ha kloareged, bodet en-dro d'an altar, a voe lazhet ivez. Goude graet kement-se e wastjont ar gêr, e skrapjont an holl vadoù, e tangwalljont an iliz-veur hag ez ejont kuit en o bigi brezel, o kas ganto prizonidi, gwazed ha maouezed ».

Ar pezh a zo bet kontet gant ar c'hronikour-se, ma talv evit an Naoned, a zo gwir ivez evit an holl gêrioù a c'houzañvas argadoù taer a-berzh an Normaned. Gwechoù a veze koulskoude, ma veze espernet an dud ha ma 'z ae kuit ar Vikinged hep lazh ha skrap. Selaouit 'ta ar pezh a c'hoarvezas e Redon un toullad bloavezhioù goude ar freuz hag ar reuz a oa bet en Naoned : Bez e oa, e Redon, d'ar c'houlz-se, un abati hag e oa bras e sked dre ar vro ha pelloc'h c'hoazh. Ar venec'h o devoa aon rak an Normaned, rak, ouzhpenn ma azaouent doueoù pagan, e oa anezho pikolioù paotred paket mat ha start ouzh an douar, blehoc'h evit bleizi, tud hep feiz na reizh, ha skedoù taer ha ferv en o daoulagad. Pa glevjont edo ar vrezelourien spontus ha gourdon-se o tostaat, en em vodjont en iliz ha kement e pedjont ma teurvezas an Aotrou Doue kas war ar vro gwashañ barrad amzer a voe gwelet biskoazh. Bigi ar Vikinged a voe kaset da netra, ha peurzistrujet zoken. Ar pezh emañ o paouez kontañ n'eo nemet ur vojenn, evel-just, rak an istorourien, troet war ar fedoù evel m'emañ, a zispleg deomp e pellaas an Normaned abalamour ma oa bet paeet un truaj dezhe gant mac'htiarn ar vro, a oa, d'ar mare-se, Ratvili e anv.

Iliz-veur kentañ An Naoned n'eus mui, evel-just, roud ebet anezhi a-benn bremañ. En aner e klaskfer ivez roudoù hini Sant-Brieg, pe Landreger,

bet diskaret ivez gant an Normaned e-tro ar mareoù-se. E Redon, ma n'eus mui roud ebet eus ar greizenn speredel ha kefredel a skigne ar feiz kristen war ar vro, e c'heller gwelet, koulskoude, bremañ c'hoazh, iliz an abati kozh. Kaer eo da welet, gant he stummoù eeun ha diginkl, arouezus eus ar savouriezh romanek, he bolzoù diazezet war bileroù tev ha mentek, ken ledan o diazez koulz hag o lein, ha, dreist-holl, gant he zour karrezek, un tour n'eus ket par dezhañ er vro. Ma tichañs deoc'h tremen dre Redon, kit da welet an iliz-se, rak an Normaned n'o deus ket lezet en o sav kalz savadurioù eus an amzer-se. Tud ferv ha fallakr, pa lavaran deoc'h !



04 - Straed Plâtre, e Pariz, hiziv an deiz,
lec'h ma oa staliet Skolaj Kerne

1317

Skolaj Kerne, e kêr- benn ar C'hallaoued

*Ar pezh a laz h hor bro
eo an divroerezh*

Pa soñjomp, ni, Breizhiz, en divroerezh, ez omp techet da gaout dirazomp skeudenn gwall reuzeudik an dud paour a-ziwar ar maez a rankas kuitaat ar vro a-vilieroù, a rummad da rummad, da vont war-lerc'h o bara, hag alies mat dindan vistri estren, a roe dezhe da intent e oant tud dizesk, rust, genaoueien, mat hepken da lazhañ o c'horf el labourioù tenn ha poanuis : matezh da bep tra e Pariz pe vagerez e ti ur bourc'hiz bennak, mevel en atantoù bras ar Beauce, martolod dindan e Veurdez ar Roue pe e Kumpagnunez an Indez, karter-mestr war-vourzh ul lestr hobregonek, soudard war-droad en trevadennoù pell, pilhaouer kantreat, *self-made man* er Stadoù-Unanet, ha me 'oar-me... An dud-se e veze alies mat diaes-meurbet an harlu

evite, hogen n'o deveze ken dibab nemet chom da skrabat ar c'hleuzioù en o bro ha mervel gant an naon pe debriñ bara c'hwerv an estren.


Hogen estreget ar re baour o deus ranket kuitaat ar vro, hag an divroerien emeon o vont da gomz diwar o fenn amañ ne oant ket, na tost, e-touesk ar re reuzeudikañ. N'o deveze ket ezhomm, kennebeut all, da c'hounit o bara pemdeziek gant c'hwezenn ha skuizhder o c'horf, pa oant studierien. Emaomp er XIV^{vet} kantved. N'eus e Breizh, d'ar c'houlz-se, skol-veur ebet, hag ar Vretoned yaouank troet gant al labour-spered a rank mont da Bariz da beurechuiñ o studi er skolioù-meur a lorc'hañs a zo bet diazezet gant ar Gapesianed, evit dezho bezañ gouest, diwezhatoc'h, da seveniñ kargoù

uhel, e Breizh pe e lec'h all. Pariz avat a zo ur gêr vras, leun a riskloù, start ha ker ar vuhez enni, hag ar studieren yaouank nevez-deuet eus o c'hornbro a zo en arvar da ziheñchañ ha da goll o vertuz hag o ene gant femelezed a fall vuhez pe gant amprevaned ha truilhennoù an tavarnioù, ha, piv 'oar, da saotrañ brud o familh ha da stlejañ anv o zudoù-kozh er fankigell !

Da virout na gouezhfe ar studieren yaouank en ur stad divalav diwar ren ar gwall vuhez e vez digoret skolajoù evite : e 1317 e vez diazezet Skolaj Kerne gant ur beleg eus eskopti Kemper, Galeran Nicolas e anv. Eizh vloaz goude, e 1325 e vez krouet gant Guillaume de Coëtmohan, doktor war ar gwir e skol-veur Pariz, ur skolaj all, evit ar studieren eus a Vro-Dreger. Ken brokus ha ken efedus all eo pennoù bras Sant-Maloù ha Kastell-Paol, pa vez digoret skolajoù ganto ivez. An diazezhourien-se a zo deuet o anvioù betek ennomp ivez : Geoffroy du Plessis, evit Skolaj Sant-Maloù, hag Even de Kerobert evit Skolaj Leon.

Ar "skolajoù"-se ne oant, er penn kentañ, nemet tiez ma veze lojet ha maget ar studieren enne. Buan a-walc'h avat, diwar skouer ar skolajoù bras, pe saoz pe gall e vijent bet, e voe ledanaet o c'hefridioù ha gopret e veze gant ar skolaj ur mestr-studi hag a sikoure ar studieren da greskiñ o anaoudegezh war ar gwir, eus ar brederouriezh pe eus an doueoniezh. N'ouzon ket ha fur hag aketus da zeskiñ e voe an holl Vretoned yaouank bet kaset evel-se da Bariz, ha tro 'zo da grediñ ez eus bet, en o zouesk, pennoù enebañ pe fallbennoù hag en em gollas e kêr-benn ar C'hallaoued. Lod kaer anezhe e c'hoarvezas ganto, moarvat, un dro fall bennak. Tud all avat, bet klevet mat gante kentel ar furnez, a zo chomet da beuriñ e park ar ouiziegezh hag o deus tapet un tamm mat a zeskadurezh. E-touesk ar re a reas o mad eus kelennadurezh ar skolioù-meur gall ez eas ar maout, hep nep mar,

gant tud Plourin-Gwitalmeze, ha, dreist-holl, gant ar re Vohig. Selaouit 'ta : Herve Bohig, tad karm, a voe barzh ha prezegenner brudet ; Even Bohig a yeas da gelenner war ar gwir e skol-veur Pariz, ha dean ar chabistr en iliz-veur e voe ivez da zibenn e vuhez, e 1330 ; Henri Bohig, kelenner war gwir an Iliz ha doueonour, a savas, e 1349, ul levr brudet, ennañ addisplegoù kelennadurezh ar pap Gregoire IX ; Jean Bohig, en hevelep bloaz, a voe anvet da rejant ar skol-veur ; hag evit echuiñ, menegomp amañ, peogwir emaeomp ganti, anv Guillaume Bohig, bet prokolor meur ar roue. Ha talvezout a ra ar boan displegañ hiroc'h ?



05 - Golo tom 9 *Itinéraire de Bretagne* e 1898

1636

Beaj un denjentil eus an Normandi e Breizh

*Ar bale-bro a zigor ar spered
hag a sedera ar galon*

Ar geriadurioù a lavar deomp e voe ijinet ar ger “tourist” e-tro ar bloavezhioù 1830 gant ar skriva-gner Stendhal. Padal ez eus bet, a-holl-viskoazh, a bep seurt tud o veajiñ, lod evit o micher, lod all evit silvidigezh o ene, lod evit ar brezel. Ret mat eo anzav avat n’eus ket bet, ken e oa an XX^{vet} kantved, ur maread a dud o veajiñ evit o flijadur. Techet e vefer eta da grediñ ez eo berr ha skort al lizheradur diwar-benn ar beajoù e Breizh er c’hantvedoù tremenet. Ken abred hag ar XVII^{vet} kantved avat ez eus bet skrivet hag embannet un toullad levrioù-stur evit ar veajourien, ma veze anv enne eus hor bro. Daoust m’eo gwall zister an dalvoudegezh istorel ha lennegel gant an darn vrasañ eus al levrioù-se, ez eus memestra un dornadig anezhe hag a

c’heller lenn, breman c’hoazh, gant plijadur ha gant frouezh. An hini muiañ anavezet a zo, war a gredan, an *Itinéraire de Bretagne*, ur pezh pikol levr bet skrivet gant un denjentil norman, a oa Dubuisson-Aubenay e anv.


Emaomp er bloavezh 1636, n’eo ket hanteret c’hoazh ar XVII^{vet} kantved, ha dileuridi Breujoù Breizh a zo bet galvet d’en em vodañ en Naoned. Evel bep tro ez eus bet kaset kannaded gant roue ar Franzision, en o mesk Jean d’Estampes de Valançay, kuzulier e parlamant Pariz. Beajiñ a ra, gant e dud, dre holl e Breizh, e-pad un toullad mizioù, evit kejañ ouzh ar pennoù bras, selaou klemmoù an dud vunut, evit ensellout stad al labourioù war an hentoù ha war difennoù an arvor. An Dubuisson-

Aubenay-se, am eus graet anv anezhañ uheloc'hik, a oa unan eus e dud, ha beajiñ a rae war un dro gant kannad ar roue. E gefridi a oa, moarvat, aozañ danevellskridoù evit e vestr, met Dubuisson e oa savet ennañ, yaouankik-flamm, an debron skrivañ, ha, ma vije bet bev-mat e faltazi, ez eo, hep nep mar, romantou kaer eo en dije bet roet deomp ; hogen ne oa ket den da lezel e faltazi da vale bro, rak netra ne blije muioc'h dezhañ eget adskrivañ kement a wele ha kement a gleve pa veze o foetañ bro. N'ouzomp ket kalz a dra diwar e benn, met hervez lavar ar re o deus bet tro da zaremprediñ anezhañ, e oa ur spered lemm a zen, un arvester hep par, a veze diehan o sevel notennoù evitañ e-unan. Gant se n'eus ket da vezañ souezhet m'en deus skrivet kalz traoù en tu all d'ar pezh a veze goulennet gant e vestr war dachenn e vicher.

Ha gwell a-se deomp, lennerien an XXI^{vet} ! Rak e levr a zo, e gwirionez, ur vammenn diheskus a ouiziegezh evit an istorourien hag evit nep piv bennak a fell dezhañ anavezout gwelloc'h istor Breizh. Petra ne gaver ket el levr-se ? Dubuisson a bled gant istor ar savadurioù, gant furmoù an torosennadur, gant arz ar sevel kartennoù mor, gant stumm, hirder ha kas ar stêrioù ; sevel a ra roll ar chapelioù hag ober un deskrivañ anezhe ; klask a ra penn da gudenn an anvioù-lec'h, o zalvoudegezh hag o orin ; taolenniñ a ra ar c'hêrioù, ar parrezioù, ar bourkoù, bras pe vihan, e tichañs dezhañ ober un tremen enne ; a-drugarez dezhañ e ouzomp bremañ ur bern traoù diwar-benn stad al labour-douar, ar pesketaerezh, an artizanelezh ; reiñ a ra e ali – didro-kaer – diwar-benn ar gloer vreizhek, adalek an disterañ beleg betek an eskibien, diwar-benn an noblañs ivez ; dre e levr e ouzomp e pelec'h e c'helle ar beajour, er XVII^{vet} kantved, kavout tavarnioù – mat pe fall – hag ostalerioù evit cheñch kezeg ; gouzout a reer ivez dre be hent e c'helled mont, dre ar berrañ, eus

Kemperle da Gastell-Nevez-ar-Faou ; displegañ a ra ivez, dre ar munud, peseurt kemm a zo, d'ar c'houlz-se, etre Breizh-Izeliz ha Breizh-Uheliz. Ha peogwir ez eus anezhañ ur gwaz, e sell ivez, anat deoc'h, ouzh merc'hed ar vro : re Enez-Groe, da skouer, ne blijont ket dezhañ, abalamour ma 'z int, d'e veno diantav, divalav-meurbet, ha bronnet re zister. Padal merc'hed Sant-Maloù, mard int mentet bihan, a zo ivez koant, d'ar peurliesañ, ha kroc'hennet flour.

N'eus ket, e gwirionez, a levr koulz ha hennezh da gaout amploc'h anaoudegezh eus doareoù-bevañ hon hendadoù er XVII^{vet} kantved, pe e ve a-fed buhez danvezel, pe a-fed buhez speredel, ha da aesaat e labour d'an danvez istorour !



06 - Flemmskeudenn eus Alexandre Dumas

1869 Tad d'Artagnan e Rosko

*Mouskeder : soudard a
embreger ur mousked.
Mousked : arm-tan hezoug,
dezhañ ur vouchenn, hag a veze
harpet war ur c'haol a-benn
e embreger.*

E-tro dibenn miz Even 1869 e welas Roskoiz un iskis a zen oc'h en em gavout en o c'hêr hag oc'h ober e annez en estaj kentañ un ti bihan damdost d'ar porzh. An den-se a oa un hiron kroc'hennet teñval, ur c'hofeg tev-tev anezhañ, dezhañ ur pennad blev spulc'het ha daoulagad lemm ha fisel dindan e zivabrant foutouilhek. A bep tu d'e fri togn, e zivjod bougennek a dape betek e c'houzoug. Meur a hini e kêr en em c'houlennas, sur mat, daoust ha piv e oa an esparadenn a zen-se, ha meur a Roskoad, moarvat, a gredas e oa un den en e aez, ur mondiañ pinvidik bennak, marteze a-walc'h ur bourc'hiz, pa oa deuet gantañ ur vaouez kozh, Mari hec'h anv, a dalveze dezhañ da vatezh ha da geginerez. Hogen m'en dije an

estrañjour-se klevet unan bennak o lavaret e oa ur bourc'hiz anezhañ, e vije aet en egar, hervez e bleg, ha sed, dre vras, penaos en dije serret e c'henoù d'egile : « Klevit mat, marmouz ! N'eus ket ac'hanon ur bourc'hiz ! Un arzour avat ne lavaran ket ! Ya, rak un den a bluenn a zo ac'hanon, ha brudetañ skrivagner ar vro zoken : me eo Alexandre Dumas, tad *An Tri Mouskeder* ! ».

Dumas, e 1869, a zo seizh vloaz ha tri-ugent, ha skrivet en deus bet an darn vrasañ eus e romantoù. Skuizh eo, hag e yec'hed n'eo ket eus ar re wellañ. Evit diskuizhañ eo ez eo deuet betek Rosko, mes un den eveltañ ne c'hall ket chom hep labourat, ha labourat, evitañ, a zo duiñ paper. An embanner Lemerre, eus Pariz, en doa c'hoant, abaoe pell a oa,

da embann ur *Geriadur ar geginerezh*, ha Dumas, kontet da vezañ ur bever brav troet meurbet gant ar festailhoù hag ar boeson, boazet d'ober chervat aliesoc'h eget d'e dro, a asantas skrivañ ar geriadur-se. Neb a fell dezhañ kas da benn ul labour ramzel a seurt gant hennezh avat a rank en em dennañ en ul lec'h sioul pell diouzh e vignoned ha diouzh safar ar c'hêrioù, ha setu penaos ar skrivagner e tiwanas en e benn ar soñj ober e annez, evit tri miz, en ur porzh eus Breizh-Izel.

Rak Dumas ne oa ket an dro gentañ dezhañ teurel pled ouzh hor bro : e 1850 e oa deuet a-zindan ar wask ur pikol levr titlet *Ar Beskond a Vragelonne*, a dremen lod eus e chabistroù e eskopti Gwened er XVII^{vet} kantved. Ar romant-se, an hini diwezhañ eus rummad brudet *An Tri Mouskeder*, ez adkaver ennañ Athos, Portos, Aramis ha d'Artagnan, nemet ez int koshaet, peogwir e tremen al levr-se un tregont vloaz bennak goude o zroioù-kaer kentañ. Koshaet, ya, ha pinvidikaet ivez : d'Artagnan a zo aet da Varichal Meur ar Roue, hag Aramis da eskob Gwened. Sed a lavar Aramis d'e vignoned a-zivout e garg a eskob : « Erru on kozh, va mignoned ; trouz ha safar ar c'hêrioù ne zereont mui ouzhin. D'an oad m'emaon-me bremañ e rankan klask ar peoc'h hag ar preder. O c'havet am eus amañ. N'eus ket ur vro gaeroc'h ha rustoc'h eget an Arvorig kozh ». Ar vousketerien a vo kriz o flanedenn avat : d'Artagnan a vo lazhet da geñver seziz Maestricht, Athos a varvo gant ar glac'har goude marv e vab, Porthos a vo flastret dindan ur roc'h e Lokmaria, hag an hini nemetañ a chomo bev a vo Aramis. Kentel da dennañ ac'hano : dizañjerusoc'h eo bezañ den a lliz eget den a gleze !

En hañv 1869, p'en em stag Dumas gant e labour e Rosko, n'en deus mui nemet ur bloaz hanter da vevañ. Darbet e voe dezhañ mervel gant an naon e Rosko, a-greiz skrivañ e c'heriadur, rak e geginerez a nac'has fardañ ar boued-mor a veze prenet war

ar marc'had (pesked a bep seurt hag a bep ment, a bep blaz hag a bep liv, kregin, istr, ha me 'oar-me), ken e pakas-hi he zammig peadra, prim-ha-prim, en ur sac'h, hag e tistroas da Bariz a-benn un nebeudig amzer... Dre chañs evit Dumas avat e voe pedet bemdez ouzh taol ar Roskoiz, evit espern dezhañ ar boan da geginañ hag ivez evit dezho kaout an enor da zebriñ gant un den brudet. Gant se en devoe Dumas, tri miz-pad, tinell n'oufec'h ket a well. Skrivañ ha debriñ mat, se ne oa ket da zisplijout dezhañ. Hag e skeud-se, da vihanañ, e tremen buan an amzer ! En em c'houlenn a rit, marteze, petra a dalv e c'heriadur ? Me n'on ket evit lavaret deoc'h, rak n'em eus ket lennet anezhañ. Mod kozh ken-ha-ken e vefe ur seurt lizheradur deomp-ni hiziv rak an dud, d'ar c'houlz-se, ne oant ket troet nemeur gant ar vouedouriezh, ha ne ouient ket sevel rekipec'h kempouez ha yac'h, hag emsavoc'h, distambouc'husoc'h a galz e ve lenn al levrioù keginerezh a-vremañ !